

(459)

Guez
Gabriella a Vergy.

Var an ton galles.

Alas ! piou bigen sur a gredo
Carantez Raoul a Loucy ?
Piou, hep gouela, james a lenno
Histor Gabriella Vergy ?
O daou, aboue o bugaleach,
En em garie a vuir galon ;
Mes dre urz he zud hy n'em angach
Dindan lezeu ur quir leon.

Fayel, fried da C'habriella,
Treantet gant ar jealousy,
A ranfermas ar vreg fidella
En ur prison leun a anui.
(460) Peb mignon a voa dezân suspect,
Mes dreist oll Loucy he c'harie,
Ha Gabriella coupabl rentet,
Pa vouezas o quir garante.

Hy e ven a scuill bepret daelou,
Evit essat dont d'e galmi ;
Nac he yaouanqis, nac he charme,
Netra na ell en desarmi.

« Petra eo va c'hrim, ò va fried !
» Va vertuz a dle va difen ;
» Fidel ouz d'eo'h, hac e vin bepret ;
» Petra'llit rebech din heqen ? »

« Partach an tourmancheu a souffran,
(Erne an argarzus Fayel)
» Gouezet e meus tout..... bonch qef Satan,
» N'achappi qet d'am dorn cruel.

» Loucy en deus dit calz re blijet ;
» Mes soudan me en em venjo :
(461) » E hano a droubl oll va speret,
» Mes en hoad me er mougo. »

Gouscoude, Loucy, ar parfeta
Eus an oll vignonet fidel,
O c'houzout penos Gabriella
E devoa ur sord qer cruel,
Dre un effort, pini an natur
N'approuvas qet hep premissa,
Eus ar plaq moa e oll blijadur
En em resolv da quimizada.

« Mont rân, emezân, dre va absanç,
» Da gontanti ar monst Fayel :
» Quittât a rân vit bigen ar Franç...
» O beach hir, trist ha cruel !...
» Neus fors.... me en em sacrific
» D'un objet qer carantezus :
» Contant, ma ellân, dre va maro,
(462) » Renta Gabriella eurus. »

Prest e parti evit an arme
Assamblat en donar santel.
Occupet da gombati neuze
An oll Sarazinnet cruel.
Gerqent, e penn daou c'hant cavalier,
Tud demeus ar re vaillantâ,
E teu da flastra en o antier
E adwersourien horrupla.

360

An disesper, couz hac an arrach,
 Bep tro o tiffrañ e galon,
 A redouble e gowrach :
 Terrubl voa evel ul leon.
 Mes gant euz taul lan, blesset mortel,
 Ractal d'an douar discaret,
 Daoust d'e oll essa evit sevel,
 E coez e creiz e hoad beuzet.

Pa velas e voa tost d'e varo, (463)
 E c'halv e Ecuier soudan,
 Ha gant calz a boaz neuze eno
 E scrivas var e rondachen.

Monlac a euz en ur gual
 — « Na deu get da glêm ac'hanon ;
 » Mes clêm qentac'h an hini ne all
 » Appesi un tigr, ul leon.

» Va c'harantez c'heus anavezet ;
 » Aoiac'h eo se d'an c'hontanti :
 » Cass va c'halon d'an muia caret,
 » Gant ar gouzou ouz ho traci.
 » Ennout ec'h ellan o c'honfia »

Mervel ra en eur bronoci
 Hano e vestrez Gabriella
 Etre dirrac'h ar maro cri.

Monlac, euz ur quier servicher,
 Goude beza neuze rentet (464)
 D'e vesti qer caret peb seurt dever,
 A voa bet dezân commandet,
 A ambarg soudan evit ar Franç,
 Hac ec'h euz tost d'ar c'hastel
 Ebars pini e varv dre avanç
 Un objet qen caer hac un sel.

Dre na voa nemetan er secret,
 E teport ur moment euzus ;
 Gant soign vras eo en em dequiset,
 Evit ober e dro en cus.
 Mes Fayel, bepret en nec'hamant,

N'ez deus get ur moment repos,
 Er guel o rodal gouell sioulamant,
 Hac er sel vel ur c'hev'rer nos.

En arrêti a euz neuze,
 O sonjal en hanavezout,
 Hac er massacr a dolliou clez, (465)
 Hep differi en netra tout.
 Gant ar spont euz dessionou traitour,
 Netra na achap d'ar jalous,
 Ha ractal e fouill e adversour,
 Gant primder ha nebeut a drous.

O pebes joa zo en e ene,
 Pa vel calon braour Raoul qez !
 Pebes fulor ennân, na hene
 Al lizer a dristidiguez !
 Fixa ra anezo gant arrach ;
 Ar venjanç so en e galon :
 « Ha ! emezân, din pebes outrach,
 » Ha brava present d'an Itron !... »

Destimet ar galon, al lizer,
 Ne zelaou nemet e fulor,
 Hac e vedit ur venjanç hep niver,
 Leuz euz a spont hac a horror. (466)
 Ar jalousi dû hac execrable
 En em disqueuz dezân bep tro,
 Ha d'e gontanti, ar miserabl
 A gav c'hoas re douç ar maro.

Tanvea ra dija en avanç
 An douçder er promet dezân,
 Ha demeus ur seurt trist esperanç
 En deus auz na vez pell outân.
 — « He fell din, d'an traitourez iflam,
 » O coach derji ar virione,
 » He lagat da zebri en mil dam
 » Calon Raoul, hep gouzout doare. »

Euz eo eta 'n heur maleurus

